

— 7 —

---

## CHANSON

**VAR SUJET AL LABOURERIEN DOUAR.**

---

**S**RLAOUIT oll, hac e cléfot eur guentel  
A zo grêt a nevez var buez al Labourer;  
Un etat a zo poannius, n'o deus qet calz a repos,  
Neb e gra gant pacianiet a c'honit ar Barados.

Eul Labourer en em expos d'an amzer,  
Qercoulz d'ar yenien evel pa vez an domder;  
Pa vezerc'h, scorn, caserc'h, grizill, curen, glao hacavel,  
Baleit, hac qefot ato en e barq al Labourer.

Eul Labourer zo habillet e tien.  
Ne ve qet brañ bemdez evel ma ve ar vourc'hizien;  
E habit zo struillennec, gant an douar labeet,  
Calz a dud a renq e gaout, hac a granch ous e velet.

Differanç a zo etre cundu ar hourc'hizien  
Hac au houi a ra lod demeus al labourerien :  
Ar re-ze o deus qig ha pesket, bara goen, soobes vad bepret,  
Hac eul Labourer, tamou yot, bara sec'h ha dour bervet.

Eul Labourer, labeet elec'h ma caro  
A vez o qaquetet, calz a dud eo disprizo;  
Gouscoudeqementzo er bed, marqueront dont da sönja,  
Eo diwar goust al Labourer e ma ar bed oll e veva.

D'ar c'henta poent, e ranqo eul Labourer  
Paea taill d'ar roue bep bloas un teir pe peder.  
D'an eil pa renqo paea e vestr, ma na vez prestearc'hant,  
E vez o foar var e zanves : homän eo an nec'hamant.

## — 8 —

D'an drede, e renq paes an deog d'ar person,  
 Evel ma zeo ar c'hostom, qementse a zo rézon,  
 Ita rei o c'hest d'ar vélleyen, an aluzen d'ar beorien;  
 Ilac eyit na fazint qet, ar güir d'o servicherien.

D'ar bélvare, pa zemeer ar vugale,  
 E renquer o argouli, an danvez a izel neuze;  
 Ha mar be rust ar mibien-caer, antronos goude eureuji,  
 Ma na ve prest an argoulou, er pillint evel bleizi.

D'ar bempet poent, mar sonch dont da brocedi,  
 E renq caout eur yalc'had vad a arc'hant da zistribui :  
 Neus nac avocat na procuror, greffier, huissier na serjant  
 A rae an distera toi pluen evitan anes caout arc'hant.

D'ar chouec'hvet poent, e renqo laqat evez  
 Da zioual eos an tan da gregoi en e zanves;  
 Ennes a zo un element pa ve eur vech alumet,  
 A laqa calz da vont d'ar bas, ha memes da glasqo boued.

Ar seizvet eo al laeron gant o oll ardou,  
 A binç eul Labourer hac a fouill e c'hoodellou;  
 Ha pa ell attrap ar yalc'h, netra gantian na lezer;  
 Cetu penos goude e oll boan e za madou al Labourer.

Eul Labourer c'hoas a vez o caquetet,  
 Hac e zanves o vont, n'en deus guer da lavaret.  
 Endra ma e mi o conta e arc'hant, mignon a c'hoarze dezàn.  
 Ma c'hollent e guignat e raent, hac ober goab anezan.

Ar chanson-mâ a gaser etrezoc'h, Bretonet,  
 Var un ér excellant a nevez eo composet,  
 Raç-se ta, me ho suppli da brena peb a gopi,  
 Evit e lenn ha passeai ho chagrio ha melconi.

FIN.

---

É Montroulez, eas a Imprimerie Lédan.

